

MOUEZ AR C'HLEIER

Canaouen evit benediction pevar gloch
nevez eus ar re gaera, gret e iliz Sant-
Martin-Montroulez, gant an Autrou Escob
Henri-Victor-Félix VALLEAU, ar 26 eus
a vis Gouere 1896. (Gouel santez Anna).

TON : *Cantic sant Ivisiau.*

Sônit, sônit, sônit, cleier,
Taulit ho mouez a dreuz an ær :
Pa zoc'h da Zoue consacret
Rentit enor, gloar d'an Drindet. *(bis)*


Lavarit galloud ha meurded,
Ha carantez Crouer ar bed,
Ar sourcen beo eus a bep mad
Or Mestr, on Autrou ac on Tad. *(bis)*

Lavarit bemdez da bep den
Cass varzu Doue e beden :
Ur beden gret a greis calon
A bign atao betec e drôn. *(bis)*

Meulit calon sacr om Salver
Er Sacramant eus an Auter,
Madelez ar Verb incarnet
Dindan spessou dister cuzet. *(bis)*

Canit, ive gloar d'ar Verc'hez
Gloar d'an oll soent ha d'an ælez :
Canit cleier, sônit lirzin
Dreist oll da bardon sant Martin. *(bis)*

Canit gloar da santez Anna
A zo caret cals er vro ma,
Caret cals ha cals enoret
Evel Mam goz ar Vretonet. *(bis)*



D'an ôll suliou ha d'ar goueliou
Taulit gant ners ho poleou,
Da c'hervel an oll bobl fidel.
Da zont d'an offissou santel. *(bis)*

Sônit cleier, laouen ha drant
D'ar buguel deiz e vadisiant,
Ha pa raio e basc kenta
Sônit deza soniou a joa. *(bis)*

Grit c'hoaz ho caera soniri
D'an dud iaouanc oc'h eureuji,
Kemerit pers e joausted
E levenez tud an eured. *(bis)*

Mez pa deui en un ti christen
Ar maro da scuill an anken,
Kemmeskit gant e irvoudou
Clemou tzuezus ho clazou. *(bis)*

O ! lavarit da bep ini
Divoall mad da falgalon
Evel tud ha n'o defe ket
Na feiz nac esperans ebet. *(bis)*

Lavarit c'hoaz d'ar gristenien
Peguent prompt, allas ! e tremen
Gloar ar bed e blijaduriou,
E vadou, e oll enoriou. *(bis)*

Savit huel o c'hâlonou,
Grit dezo sonjal en Envou,
Caout en o memor, deiz ha noz,
Gloar, evrusted ar baradoz. *(bis)*

Ac hirio canit en enor
D'on Escob, on Tad, or Pastor !
Lavarit deza mil bennos !
Buez hir ! *ad multos annos ! (bis)*